

GUERZ NEVEZ

Var un ton nevez.

M'am be aoualc'h a studi, a speret da rima,
Hac ar bluen em dorn, lia' me prest da scrifa,
Me gomposte ur reglea ervez va santimant,
Var sujet un atretien entre daou den yaouanc.

Mes quant avañ davantañ me c'houlèn assistañ
Eus ar sperejou caëra quant evit e c'hommanç,
Da rei lumier d'am speret pa meus occasion
Da ober ur son nevez ervez va intantion.

Pa lontan ul leor bian zo en cayer va study,
Me a gav traou surprenabl hac a ra chagrin din,
Pa lontan va flaneden scrifet gant va mestres,
Eus va brassa plijadur me meus tristidiguez.

Pa voan ebars em jardin em oïl gontantamant,
Me remerças ur fleuren a voa yiñ ha brillant,
Quant brillant e voa e deñlou hac an eol ardent,
Pa deu dezan para ebars ar firmamant.

Ounnes zo ur fl'uren eus a velanconi,
Antreet doun em c'halon ha diez da effaci;
Priañ an oïl amourouset, roue an dud yaouanc,
E c'handa dre e sellou d'am rentañ languissant.

Quenta m'am boe an enor da velet va mestres,
E voa er porchet goude an oferen bred;
An eil guez'h ma e guezis assuri a ellan
E voa bars an ilis bei e communia.

O ober e fasq quenta e mesq ar vugale,
D'ar poent-ze e voa yaouanc ha me a voa ive;
Aben ur pennat goude e his d'ar seol da Guengamp
Hac hi er memes amzer a voa bars ur gowant.

Ma tenis da zilezel va education,
Eñt dont d'e antreteni eus a greis va c'halon,
Eñt dont d'e antreteni Rouannes ar fleuriou,
Hac eus ar c'haëra fleur a zo er jardinou.

Ounnes a zo eur fleuren a velanconi,
Caeroc'h evit fourdelis nac ive romani,
Am eus dezi goenvi assuri a ellan,
E lacañ va c'halon var ar poent da rannan.

An eil de a vis eost me lacas em speret
Hac ive em fantasi mont da velet merc'het,
Mont da velet va mestres, Rouannes va c'halon,
Va oïl desir er bed-mâ, va inclination.

Debonjour dec'h va mestres, an devez a hirie,
Gant ur galon gontant evel zo ganeme,
Couscoude pa en em sonjan e voa din lavaret,
Ne ran nemet coïl amzer o tonnet d'ho cuelet.

Sot oc'h sur, va servicher, ma teuit da gredi
Ar goal deodou milliguet, zo o clasq hor separi;
Ha pa vec'h din dispennet qer munut hag ar pell,
Se ne rafe qet din-me donet d'ho dilezel.

Pell so deus a amzer me am boa desirèt
E teujac'h d'am saludi evel va muia caret,

Ne larec'h guer ebet, ne rec'h qet a seblant,
Me m'boa displjadur, mar e doe plac'h yaouanc.

Traitourez milliguet! chenchit ho preposiou,
Rac defianç a rit din pa lavarit ho comzou,
Rac difianç a rit din na glévan ho comzou
Ebars cayer va studi demeus ho preposiou.

Eleal, va servicher, va c'hredi a ellet,
Rac me sinfe gant va goad ar pezh a meus laret,
Delc'het d'am darempredi a bet fidel din me,
Biquen na vemp separèt an dii dious eguile.

Quen a deuio Doue d'hor guervel evit a vech diveza,
Da vonet da renta cont da Groner ar bed-mâ,
Quen a deuio ar maro da finissa hor bue,
Biquen na vemp separèt an eil ouz eguile.

Me meus guelet va-uoan differanç diouzin,
Mari, Mari, va mestres, eus ho tarempredi,
Ha tud a zo puissant, o deus renq ha leve,
Me na meus qet a vadou, goud aoualc'h a rit-se.

Ouspen da guement-se zo emei, va servicher,
Ar madou hag an arc'hant a eller da ober;
Un den a vez demezet enep e santimant,
N'ell qet terri e gontat evit aour nac arc'hant,

Quement zo var an douargant va Doue crouet,
An oïl aour, an oïl arc'hant en ur pres destumet,
Hac e vent roet dime ne ven qet c'hoas contant,
Ma n'am be qet ar boneur da possedi va c'hoant.

Me a meus grêt ur boqet demeus a zivision
Evit rei d'am mestrezie pass-etans d'e c'halon
Hac a meus grêt anezan dimeus a huanad
A lacaio d'en erren ur ruban eus va goad.

O tistrei eus ar pardon, ha var lein ar mene,
Un devez dreist ar re all hi laras din-me:
Ma na guerit chanch a gontre pellât diouzin,
Ar goal deodou milliguet a glasq hor separi.

Ounnes eo ar bromesse o poa-bu dime grêt
Diveza m'am boe an enor va mestres d'o cuelet!
C'houi a prometis dime hac ive dre o le
Na vimp qet separèt evit deus ho coste.

Varben un nenbeat goude int be dispartiet,
An effet eus ho comzou a zo bet eprouvet;
N'eus netra var an douar m'el assuri ervat
A seol an tol qen mortel evel ur goal deodat.

Pa voan ebars em guele nos goue ar Rouane,
Me glève un eñu em jardin hac a gane yiñ;
Lavares a rê facil an eñuic dre e son:
E ma da vuia-caret en desolation.

Deus ar mintin pa savis, me scrifas ul lizer
Da gaç d'am muia caret dre dorn ur messenger,
Da glével e santimant evit arvech diveza,
Guell eo mervel buan eguet chom da languissa,

Pa erruas ar messenger ebars ty va mestres,
E voe diguemeret mat evit e ziveza guez,
Qemer eure al lizer hac antren en e c'hamb
Da scirfa din va c'honje neuze soudan vantant.

O setañ a c'houlennit emei va servicher,
Assuret oc'h d'e havet, ia, en bér amzer ;
Ma visac'h d'am santimant, mad ec'h ellit credi
Na voa nemet ar maro capabl d'hon separi.

Mes na breman na goude, emei, se zo certen,
An amzer din d'ho caret ne arruo biquen ;
Amzer dec'h d'am c'haout ne arruo biquen ;
Pa em boa bolontez, e voa dec'h va goulén.

Me zo eur minor yaouanc e poursui va studi,
Ha am bezo er bloa-mañ cals a valanconi,
Hac am bezo er bloa-mañ eur galon glac'haret
Estonet bras o velet na en em garriemp qet.

Pa deni an nevez amzer, a bleun bars er spenn gwen,
E vo calon an dud yaouanc yié ebars pep tachen.
Ar fleurion er jardinou a vo tout rejouisset
Ha calon an dud yaouanc e pévar c'horn ar bed.

Mes me savo un dourel var lein ar mene,
Vis-a-vis d'a dy va mestres ha d'am hini ive,
Da vouela gant glac'har d'am amzer tremenet.
Da ober reflexion em planeden galet.

Pa voan-me deuit ac'hane ur pennad eus e zy,
Ha me clevet al lapouset er bot o fredoni ;
Ha me o chom d'o zel aon hac ive comlesant.
Rac ar chansón a ganent a voa sur ravissant.

Cana a rent qer charmant, cana a rent qer yié,
Rejouissa a rent calon tout qement a c'hëve,
Ma commançont lavaret dime ive dre e moes :
Petra dal dide, cloarec, qemer tristidigues ?

Petra ra did en em nec'hi er bed-mà gant da chanç
Danve madou zo certen ebars en abondanç,
Te so ebars er guer gant da vam ha da dad,
Ne c'heus nep necessite a voued nac a zillad.

Ha me a zo e cana ha yié va c'halon,
Ha neuser bed-mañ nep provision,
Finissa res hep retard, neuze en nn instant
Ha rentet joaus bras, calon un den yaouanc.

Guechal m'em boa un amzer a zesolation ;
Mes brema me zo joaus, triomfant va c'halon ;
Ma a voar e gaa brema certen ma mignonet,
Evel an ene a ve barnet da vont d'ar joaustet.

Var ben un neubeat goude in bet en em gavet
En ur plaç a goste o daou, elec'h m'e doa lavaret
Da renta an eit d'eguile ar pezh a voa deet,
Ha da derri ar bromesse a voa etreze grêt.

De bonjour d'ec'h, va mestres, emezan, prontamant.
Petra a zo a nevez en ho comportamant ?
Diveza ma ho cuelis e voa brillant ho sellou,
Ha brema n'ho remercan nemet o scuill daélou.

Ha hi ho respont din, ia, en ur guir bér ;
Chuiso qiriec d'am glac'har, emei, va servicher :
Retornet c'hoas ur vec'h d'am c'haout, me so contant
Da resina va buez evit cavet va c'hoant.

C hui, certen, plac'h yaouanc, c'houi certen a sobet,
Ar c'henta gouarneres imprimet em speret ;
Mes daélou va daoulagad o vouela nos ha de,
O deus va oblijet da chench a volonte.

FIN.



GUERZ

Var un ton meurbed trist.

TOSTAIT, calonon sensibl, silaout gant silañ
Ar recit eus va glac'har, trista experianç !
Ar Fortun en e c'holer, deut eus an eureustet,
Ha dre mouvamant e rod e deveus va stringet.

Ah ! tao eta, ca on baour ! izella da glemmou ;
Ro liberte d'am speret da zespeigu e boaniou,
C'houi ivez, va daoulagad, so en em disec'het ;
Va guinou n'ell mui comz, re oc'h eus-i trempet.

Brema leun a chagrin, ha va c'horf ha va ene
Abandonet a grenn d'ar brassa calamite ;

C'honi va oll faculteou ha moderation,
Evit ma ellin guell prononç va affection.

O amzer a blijadur, te so ta tremenet !
Consolation, esperanç, evidomp so collet !
Allas ! o soujal rentout parfetoc'h ar bonneur,
Hor bez bet troublat hor chanç, fabriquet hor maleur,

FIN.

Lanhuon, e ti intanvez Ar Goffic, levrer.